


TESTAMANT AR VAM GOZ

DEVISET E PEDER G'HENTEL



QENTA QENTEL

Deiz mat deoc'h oll' compagnuez,
Pa zoc'h en em gavet assambles ;
Pêvar blosas antier a so breman,
Aboe m'o quelis divezan.

Pell so oc'h eus clévet lavaret
N'en deo netra map en oalet ;
O vale, hac o pourmen dre ar vro,
E tisquer cals a secrejo.

Guechal pa oan bianic var brec'h va mag'eres
Mar emeus sonch, em boa peder Vestres :
Unan em boa e Guengamp, un all e Landreg'er,
Un all e Brosaos, merc'h un tabier mezer.

Un all am boa e Gouelou, ur plac'h a gondition,
He zad a voa aotrou, he mam a voa itron,
Hac hi a voa demezel, hac ouspen penneres,
Mes qent ma is d'he guelet, e voan pedet alies.

An'hini a Voengamp am boursuivre cruel
Da objer outi pe otramant d'e lezel ;
Qercouls e voan poursuivet gant hini Landreg'er,
Bemde e receven a Vrosaos liseriou,
Ha bemde messajer a escopti Gouelou.

Esfio, pa voan en gad demaus a hemvez mis.

Mes eno e voan conduit ha mag'et difripon,
Gant bara brén, souben dour, coc'h qi, qignen,

[ognon] ; Pa voen ia mag'et seis blas quer coantic en he zi.

Neuze e voan daouzez vlas, poent bras da zemezi.
Hac hi da glasq ar person evit dont d'en ober,
Me respontas ractal e latin caer ha scler,
An eil g'er eus va Fater a so hanvet nosler ;
Evit oc'h ini, person, viscoas na exercis,
Evel ne doun qet bet biscoas en ho catheqis.

Hac én goulen ouzin ha me vise contant
Donet da zemesi brema souden vatant,
Hac e rose din ur plac'h coant da gousqet gane
Pa vise yen ar góan da doma va goele.

C'houl so ur goël bipi, a gont din cals a dreo,
Demisi un den yaquañq n'ousoc'h a belec'h eo ;
Me lar déch franchamant na zemezin qet c'hoas,
Qen na vezø va mam pe va zat var ar plaç.

Ar person pa glévas da scrifa ul liser,
Ha me qemer pen an- ient da vont trese ar g'er,
Ma teus ar vrac'h var va lerc'h,
Da goms din evit he merc'h.
Clévit, emezi, den viouanq,

P'am boa tremenet Goengamp, aru til Kerahes
E rancontris ur vrac'h gos o vont e qær gant lèz.

Hac hi goulen diouzin ha me am boa guelet.
Yan Gornec, he goas, o vont aroc gant ur sac'hat

[ed.]

Ha me o respont dezi em boa guelet ur goas
Gant ur zae lien melén bason zei, bragou bras,
Ha gantañ ur plac'hic coant, na cesse da boqat.

Ar vrac'h pa glévas se foeltra he fodat lás.
Tronça he bros he invis var pennou he diou les.
Hac hi commanda redoc etreze Montroulez,
Va march'a yas ganti, me dar gær var droat compes

EIL QENTEL

Me a so un dijentil eas a galite vrás,
Va oll ditrou so scritet na gant avalou poas ;
Va zat oa ur princ piissant a enezenn Callot,
Hac a fraillas e oll zent gant patates ha yot.

Va zat ous ma c'haret un deize a laras din
Qemeret e vates p'am bise c'hoant demezi ;
Honnes a voa unan demeus ar barfeta

Bemde e receven a Vrosaos nseriou,
Ha bemde messajer a escopti Gouelou.

Erfin, pa voan en gad demeus a bemzec mis,
E voan importunet ha rentet quer seuls,
Ha me recommandeze donez dar foar da Runan ;
Pa o guetzen ho feder ma qemerzen unan.

An hini a Voengamp am abrasse,
An hini a Landreg'er am cherisse,
An hini a Vrosaos a zigasse ganti
A bep sort coanteri evit ma decevi.

An hini dious Gouelou a ouede, a zeplore,
Pa na garen trei outi, lezel ar re all a goste,
Neuse e voan rentet quer seuls o vale dre ar foar,
Gant ar merc'het ous ma hul eg's peder anoar.

Ha me sonjal caeroch' abars qemer unan,
Ober un invantion o laqat o feder en unan ;
Neuze e voan bianic e qichen va mestres,
Mont a ren ganti ca he godel bemdez da blaç al lèz

Un devez dreist ar re all o vonet da Voengamp,
Aruout ur c'houpl b'poucete qielhen va mestres coait
Ur filouter fin demeus a G'etahes,
A droc'has e godel dious bros va mestres.

Mè'vua' ponnerrie evidon da veza bian,
Mes al laer a voa dierc'hen hac a redas buan
En tu all d'ar vallis qent ma sellas,
Pa zigoras ar godel, tromplet en em gavas.

Hac én quer buen ha va teuel eno,
Biscoas qement all a vez n'en devoa var un dro ;
M'em boa queus em c'halon dat marc'hat am boa grétt,
O velet ar peder se en ur pez laqet,

Ha me da foeta bio treze douar Guenet.

Ma voan pèvar blas just ep dont mui d'am bro,
Ha me laqet forestour var forest Coat-Zalino.
Un nosves dreist at re all en em gavis divezat,
Aruout Guillou ar Bleiz ha va longa pen ha troat.

Ma voan en e gof diou nos ha daou ze,
Epad an amzer ze ec'h aruis em c'hontie ;
Gant ur c'hos contel a voa g'anén e troch'en peziou
A zoul e ziadren evit ma veljen goulou.

Neuze e voan laqet er g'er da zioual ar zaout,
Em boa peder danvat, ur vioc'h hac ur maout,
Em boa peder bioc'h lèz hac hul loeic bian,
E vizen casset d'o dioual en hent-bras va-unan.

Ar vugale vunut, evel ma ouzoc'h erfat,
Pa ve yen an amzer en em laqa da eoliat ;
Me voa var an hen bras etreze a Voengamp,
Mac aruout g'anen ur certen plac'h yaouanq,
Hac ha goulen diouzin da biou e voan tad,
E voan ur bug'el yaouanq en devoa feçon vad.

Mes n'oan qet den adret, den habil ha den fin.
Pa e c'hlévis o parlant e comancis c'hoarsin ;
Ha me lavaret dezi dre gomzou admirabl
Ma vizen daouzez vlas, evel nen don qet anter,
Me reqetse an enor da veza ho servicher.

Hac hi pa glèvas se, asea em c'hichen,
Dre ur guir guriosite da diada va fenn ;
Hac hi lavaret din ebars e ber gomzou,
E renqsen quittat va zaout ha mont ganti d'e bro

Em c'haseze da ur plaç da veza disqet mat,
Guell cals evit na visen gant va mam ha va zad ;
Ha me mont ganti neuzez etreze Poullaouen
Elec'h n'em boa conessanç nac anaoudeg ous den.

Ma tebas a virac il val va iere n,
Da goms din evit he merc'h.
Clévit, emezi, den yiouanq,
Retournit, ha ne vizit et fencant ;
Mar querit retorn c'hoas d'am zi,
Me reï moyen d'oc'h acordi.

Ma carac'h retorn c'hoas ur vech,
Me reï déc'h souben al lès,
Ur beren brein, un aval fall,
Na rofen da hini eus va bugale all.

Penos, e'noun-me, ha c'houi so dall,
Gant ho souben, per, aval fall,
Gant ho yot qerc'h grët gant qiq sall ;
It, it d'ar gær, mam ar burzudou,
Grac'h cos, eru ho fri en ho qinou ,
Lavarit d'o merc'h en em gonsoli,
Me ne ran qet a gas anesi.

Ma teuás un ozac'h a feçon
Da c'houssout petra voa ar réson
Penos, emezan, mic'hiec,
Difécon bras e parlantet
Ous an hini en deus o mag'et
Seis blas antier bars en e zi,
Ha c'hoas contant da zemezi.

It d'ar gær, c'houi, va mignon,
Da spaza ho caz dindan daston,
Na gredac'h qet din lavaret
Dirac den honest ebet,
Sec'ha ma fri, en ven mic'hiec.

Mes eus ho fri e man pateren ho mam-gos, +
Hac hi o vranla gant an avel evel ur c'loch.
Hac én dar gær pa glèvas va c'homso,
Ha me qemer pen an hent da vont treze va bro ;
An nos a aruas ha me da c'houlen lojan
En ti un otrou bras eus e vreg e-unan.

Pa antreis er pors e voa'n itron var an treuziou,
Ha me d'e saludi ebars e ber gomzou,
Ha me goulen diouti ha me vise lojet,
E voan us den yaouanq ne vouien pelec'h monet.

Hac hi goulen diouzin piou à rêt oc'hanon,
A bez quartier e voan ha demeus a be bro ;
C'houi zo un den adret, ho feçon a blij din,
Qeit mo po bolonte ec'h allit chom em zi.

Me so mab da ur Baron demeus a Vreiz-Izel,
Aroc ur Brinces vras émeus renqet tec'hel,
P'ini a falle dezi va c'haout evit pried,
Mes n'oa qet d'am grët hac e meus-i refuset.

An aotrou voa deus creech a deuas d'am saludi
Gant ur galon joaüs hac en ur vous c'hoarsin :
Antreit, den yaouanq, ha deut da dal an tan,
Me a meus teir verc'h coant, hac o pezo unan.

Ha me en em gaout neuse terrapl bras mor-

Ovelet voan en em gavet en ur plac qen danjerus :
Rac ad nep o deus c'hoant da viret ho goerc'hdet,
Arabat è dezo chom etouez ar merc'het.

Qent monet da gousqet e c'houlennis conje
Da vont ermès ar pors da ober eur bale ;
Pa gavis pen an hent ha me comanç da reded,
Ha caout eur marc'h mat pehini a voa dibret.

Pigna' ris var e g'ein ha d'ar galoup d'am bro,
Marc'h Hamon foulz-biscoas na c'has qer brao en dro!

Qemeret e vates p'am bise c'hoant demezi ;
Honnes a voa unan demeus ar barseta
A oufach da gompreñ birviqen er be *na.

Ha m'o pe paourente, emezan, gant ho pried,
Deus cals a druachou e viot divorc'het ;
Nep en deus comantan douar feurm ha leve,
A bæ contribution da bergeceptour e gontre.

Nep a sent ous e dat o deus bonheur peurvuia,
Me eure ar c'hontrel, ma ranqis sortia ;
Lavaret a rin crenn'en ur g'ir franchamant,
Biqen ne razen ze gant va c'honsantament.

Guell e vise g'anén en ur g'ir quitat ar vro,
Qent ma razen ar rot pa ne devoa madou,
Illa me neuse soudan qemer hent bras Paris,
Biscoas en nep tachet assur ne arrétis ;
Guell e voa stoqet va fén ebars er vezen bellan,
Ha me chom eno neuse soudan da denna va halan.

Pa voan eno eta ur poulsat reposet,
Ec'h aruas ganén eun ozac'h dilavrec,
Hac én/goulen diouzin a beléc'h e teuen,
E ranqé caout va bragou, pe e foeltrje va fén.

Setu me ta contraignet ac'hano da dec'hel,
Ha me mont da ur baros hanvet Cuvelpenportel ;
Ma chomis eno neuse vardro daou pe dri mis,
Da zisqi secrejou, micherou e peb g'is.

Me zo eur mestre micherour, mar deus en escopti,
Evit ober rochedou, boutou coat peseliou, podou pui
Ha menuser e mein, ha maçonner e coat,
Gout prena ha guersa a rán e pep marc'bat.

Afronti ar grag'es, trompla ar varc'hadoures,
Biscoas diner custum na baeis e nep lec'h,
Davantach aoun c'hoas, pa ve un amitie
Amàn etre daou zen e form a garante.

Hennes a so eur secret hac a so dificil,
Hac evit er gousout e ret beza habil ;
Rac cals a dut a so pere na ouzout qet
Fin na commançament demeus an amouroustet.

Yaouanqis so friant cosni a so noasus,
Ma vent daou demeset e vent bepret morc'hedus ;
Va amitie so bras en andret ar merc'het,
Mes ive an nep a gar a verit beza caret.

Rac se eta e pedan gant guir humilite
An ancou d'o lipat ma n'am c'heret ive,
Ar finna pot a voe biscoas er c'hartier,
Zo deut evit o quelet gant guir humilite
Hac er memes emser ar vro hac ar c'hontre.

Me'meus disqet evit va bouet
Ar pez biscoas na voa sonjet,
Da g'enta ezoun qemener,
Mestr o lestr, ramoner, qere ha qivijer,
Calvez oun hac ive maçon,

Rincer ar privenzou hac ouspen-ze, mitron.
Gant art aritmetiq hac an negromanci,
E ran' en un instant eus a zaou ober tri ;
Disqi a ran ive secrejou d'ar grag'e,
Da laza laou ha c'hoen ebars en ho guele.

Selaouit, merc'het ha grag'e,
Ar reb o deveus laou ha c'hoen en o guele,
Me zisqo deoch'eur secret
D'o laza oll, mar qeret.

Ret e déc'h derc'hel ur c'hoanen du,
Laqat en he diouscouarn eur palevars ludu,
Hac he foueta dre ar pel,
Qén na saillo en he rastel.

Neuse e commanço da yudal,
Hac e teuyo ar re al la fringal;
Ha dre ma teuint var an dro,
Gant al ludu-se en o dallo.

Neuse ec'h aller o lasa a doillou pistolennou,
Hac ober eus ho bouzellou silzic, goadeg'ennou ;
Me voar ober crampoes ha yot gant patatez,
Ha laqat ar merc'het da stotat hep paoues.

Labourat a rân er jardinou,
Ha falch'hat ive dre ar prajou,
Ober un-arat gant ar grac'het,
Hac ur c'har a la malbroug gant lostou c'huilet,
Gant treid siliou sorseresou a ran,
Laqat an dour da redec ouch'an traon ;
Devantach ez on deviner,
Bepret e ven cavet var ar mæs pe en kær.

Goud a rân ive ober croeyou,
Ober guersidi gant treid saout pe loeyou,
Butun scaferlati, jigoden gant hilin,
Ha laqat ar merc'het bepret da stotat guin.
Gori a rân ar forn gant erc'h,
Ha forc'ar merc'het da redec var va lerc'h ;
Stoufa ar forn gant aman freq,
Dasqi ar grag'ez da vrasesi an esec'h.

Redet eineus tout an departamanchou,
Da zisqi rismadelou ha cals a dalanchou,
Pere so profitapl d'ar grag'ez peurvia,
Ma qeront o disqi ha leqat o fublia.

Da g'enta ribota ha cresqi gant dour al læs,
Hema so ur secret ha n'en deo qet dies,
Nea va c'huden hac ober va deves,
Dansal hac ebata ha coussqet alies.

Ispicial ar grag'e hac a fum un nebeut,
Ur secret da viret ober tan hep qeuneud :
Capabl oun da ober tout ar pez a garan,
Ha gouzout cals a secrejou da espern ar bara.

Pa ven bijen e contân
Gousout aoun mui evit na lavarân ;
Qement tra a so tout a ran nemet brag'eyer pri,
Mar qerit va c'hredi ha va c'honsideri.

Un aval pa ve meür a ve poent e debri,
Pa oun deut en oat, poent e din demezi :
Rac-se noblanç ha paysantet, goaset ha merc'het,
Ebars em brassa anqen m'o ped va sicouret.

Ur vestres coant ameus en he zi o cluchan,
Zo hit ha ber, ha teo ha moan,
Hac a fel dei dre fors ma c'hatet da briet,
Nemedi qet d'am grat, na ne goulennan qet.

Gouscoude e deveus féçon vad;
En he fri so tri droatad,
En he daoulagat tri raouen.
Ha peder just en he dent.

Evit he g'enou charmant so terrupl dereat,
Nemet betec he diouscouarn ne bad,
He sellou a so attirant
Evel ur bern coc'h en ur pôt-cam.
Elec'h na ve hini nemerti

Un den yaouanq eus a Dréz'ger
En deus lajet an dra-mâne var baper,
An tenor demeus e vue :
Darn anezo a so g'eyer ive,
Ha darn all a zo guirione.

Bonjour ha joa, va mignonet,
Pell bras so nemeus o quelet
P'o quelis a boa na voa de all
Me so ive eur senechal.

Ne greten qet em anavesach,
Gouscoude ezoun map dar vrac'h,
Me so mestri Pieres an Dourdu,
A ra brignen gant guinias du.

Va zad so Charles ar C'horrandon,
A spaz ar c'has dindan daston,
Va breur a so an otroù Gont,
C'hoar va mam so va moereb; breur va zad so va

[yont.]
Giles Pârafaramus è va hanot mat,
Va leshano è Cocoricocat ;
G'inidic a escotti Treg er ha Léon,
Credi a rân oun natif eus a baros Crozon.

Me so un den a gondition,
Evel pa ven mab da eur baron,
Qender-gompes da Bipi Lichi'onic,
Breur-caér da Lustucru ar Piavidic.

Credit mat ezoun-me un exelant barbier.
Rac breur caér oun ive da Yan ar Rasouer,
Hac en deus qerent a gondition,
Etoues ar saout, an devet, al locou, ar c' hochon.

Lusureg'es ha pep sort diegi
A scuis ganti guell e pep ti,
Jujumel daenbris côtes mótes fariôtes
Rusmali gouloudren farionibinetes,
Nep a so diarc'hen ne gollint qet o botes.

Tud jentil, noblanç ha paysantet,
Eus a greis va c'halon me ho ped,
Na vanqit qet, va mignonet, brem,
Da zont ganeme ha retall da geania,
Evit gant plijadur recrei ho speret,
Pep tra vad ameus a bell so préparet.

Grêt emeus tost gant diou guespeden,
Pêvar gartier azen hag uglen qelliennen,
Ne dorot qet ho tent e crignat an esqern ;
Traou deliqat ameus gant hast bras clasqet,
Ha traou lipous estlam difficil da gavet,
Treit siliou, discouarn huilet ha coc'h qesec.

Ouspen evit an dessert emeus cavet,
Qerniel c'hoen, ul louarn besq, ur c'hat lostec ;
Ne gafet qet cals a dut fur
A gafe ar remâne dre natur.

Ur saladen ameus ivé clasqet,
Deliou linat ha re alec ;
Nen deus qet a guinegr nag heol gante,
Mes dour beol a so larg'ente.

Compagnunes, va excusit, mè ho ped,
Rac evit servicha certen na ous in qet ;
Qenta qentel am boe biscoas
A voe scrifet gant avalou poas.

Ha na zeszis nemet diou lisieren
Adalec va leiz hete va meren.

An cil qent ma voa deut er bet
Ne voa qet c'hoas ganet ;
Hanvel voe Yan al Lorenne ar pot fin,
Ha barner en departamanchou
Pehini en deus grêt ordrenançou
Ma renco an oll merc'het yaouanq,
Da lavaret eo, neb a zo friant ha coant,
Mont gant ho mignonet d'an arr.e,
Ha da gousqet bemnos gante.

Rac-se, merc'het va bro, enem depechit pront
Ha deut da boqat din pa vezoc'h prest da vont
Evel amazonet da gaout ho rejmant,
Da lipat ho routiq a zo potret vaillant.

Peder pe bemp plac'h a Baris
A deus d'en em glêm dre valiç,
N'oa qet avoalc'h evit pepini eur goas,
Daou pe dri n'ea qet re, na memes davantach,

Pa ezont dirac ar roue,
E leversont ar franc virione :
Fidel omp, emeze, d'ho lezen,
Accordit deomp-ta hor goulent.

Neuse soudan voe grêt commandamant
D'ar merc'het divalo hag ive d'ar re goant.
Da vont d'argær da zebri o c'hoan pe o zijiuni,
Ma ne falle qet dê passeal gant peb a hini.

Merc'het yaouanq Costes an Nord
Zo qasi peurvua eon pe dort,
Ha re'n departamanchou all, couls a're Finister,
Zo ordinal soupsonet da gavet boutou ber.

Potret yaouanq va bro, gout a ouzoch
Penos merchet Lanmeur, Plougasnou, Plouézoc'h
Plegat, Sant-Yan-ar-bis, Plouyan, Plourin, Garlan
A renqo coust pe goust cousqet gant pep a unan.

Hac an osac'h hag ar grag'es
O deus avertissamant ives
Pa viont squis da zisquisa,
Da seuch ha da zispartia :
En Orian, en Hennebont hac e Pontivi
En deus chenchet meur a hini.

An dra-se evit esamant ar vro,
Setu aru mis Guengolo,
Erru foar an Troqerezou
Da vouel Maze var mene Brez
E troq an osac'h hag ar grag'ez,

Nep a so squis gant e bar,
Laqit al licou en e fen hac it gantit d'ar foar.

Tud jentil, noblanç ha paysantet,
A greis va c'halon me ho ped,
Mar ben quer frajil d'oc'h offansi
Gant ur goms drouc-lavaret, m'o ped d'am excusi,
N'en doun qet un den en defe studiet,
Hac a velfe a bell an traou a so cuset.

Bian è va speret, bian va héritach,
Testamant va vam goz a vo va oll bartach,
Hounes a laras din dre gomsou excelant,
D'ar c'houls ma voa hi eos me a voa den yaouanq.

Va mab, na laqit qet, mar qeret,
Ho stil e peb léc'h da re garet :
Dalc'h va mir g'enet da yalc'h ;

Elec'h na ve hini nemerti
 Ar goanta è, m' credit din ;
 Na na gomisan outi avichou,
 E ve qeit he musellou
 Evel lost ar c'has var an treujou.
 Ar plac'hic-mà pa ya d'an danç
 A so leun a goneqanç ;
 Qer qare eo haë ur variqen.
 Croug'et e yen qent mat e charen.

Compagnunes, mar em c'hredet,
 Me a so bet teir guech demeset :
 Da g'entà em boa ur plac'h yacuanq ;
 Hounes na voa na vil na coant.

An eil à voa un intanves,
 Ha na voa nag ès na dies,
 An dredre a voa ur gos grac'h,
 Na ne voa na clân na yac'h.

Er bla qenta ma temesis,
 E voa meularjes er c'horais ;
 An eil bla ma voan demeset,
 E voa ar Pasq bras da Nedelec.

D'ar Rouane e creis an ân,
 E temesis ar vech divesan
 Da ounes còs ur bla ha cant,
 Ne voa en he fén nemet un dant,
 Ilac e sonjen e voa yaouanq,
 Tromplet voa va speret gant e g'enet,
 Monet a rân d'ar gær d'e guelet.

TREDE QENTEL.

Selaouit oll, tud yaouanq,
 Comsou meurbet divertissaint
 Evit recrei ho speret,
 Mar bee'h gant nec'h tourmantet.

Adalec va lein bete va meren ;
 Hac e larent oll din ar scolaerien,
 Birviqen ne rajen nemet ur vouriqen,
 Ar vagabonet-se a voa inoçantet,
 E laret un dra na onient qet ;
 Gouscoude e voan seis sisun pe eur mis
 Abars biscoas netra tna ouiis,
 Pini avoa anaout pén an asen,
 Qender-gompes d'an oll dut scolaerien.

Rac-se na vesit qet den soueset,
 Cals a dut a vez alies tromplet,
 Gant eur c'hrevast hep monet pelloc'h,
 Nen deus netra tout er bed-màñ dificiloc'h.

Mar gousoc'h ar fèçon, respondit propr,
 Ha lavarit pe ben d'ar c'hrevast a ya aroc ;
 Serrit ho qinou, pa ho pedan,
 Brémân ar guel studia a rân.

PEDERVET QENTEL.

Ouc'h oac'h dibales dious Paris,
 Lantiguen eol decot ilis disso :
 Evit al latin-mà ne ententet qet,
 Selaouit oll e bresonniec,
 Hac e cletot e ber gomzou
 Publia an ordrenançou.

Un ozac'h còs a Boullaouen,
 O vont d'ar foar da Rostrenen,
 Da anter Ebrel e mis Even,
 Etre unech heur ha creisde,
 E c'hanas daou a vugale.

Qenta mab en devoe voa Yan Farioqin,
 Ur gourmand infam stoter et vasein,
 Zo bet e Paris o tesqui an nigromantç,
 A eston an dut sot gant cals a eloqanç

Dalec h'va illi g'chet da yac'h,
 Ar bleis ma ve demezet a zeufe dou aoual'h.
 Benos Doue d'an diner
 A ra e hostis e pep qar,
 Gallec ha brezonniec a oar,
 Hac ober è hostis e pep foar :
 Ap amzer a ra an hat,
 Hac an arc'hant a ra ar marc'hat.

Merc'hèt qèz, divoallit teod fal bioc'h kikamoult,
 Hounes so, moc'h assur, ur pez an tanfintoult ;
 Evidon-me, neus fors ha pa ven tamallet,
 Va deviz a vezoz : E PEB HENT LEALDET.

Setu amàn Testamant va mam gòs,
 Pini a dleit lenn hac en deis hac en nos,
 A voa serifet pemzec de qent ma clàvans,
 Ha dictet tri dez goude ma varvas,
 Testamant caer, serifet gant plous,
 A so bet alaouret gant daoulagat picous.

Composed gant Ustach Toraval,
 Hac e gonsort Jérôme Kikikokokaraval,
 E gamarat Yan ar Maout, goroer ar zaout,
 Hac e g'ender Yan ar Zaout, a zo mal e gaout.

Nep a fel dezàn cavout an Testamant,
 A renq eta donet promptamant
 Da Vontroulez da di LANOE, Imprimer,
 A g'ever en e di pa ve chomet er gær.

(Propriété de l'Imprimeur.)

F I N

